

Gwerz Santez Anna Wened


Me

eo

ANNA

Mamm

Mari!




C'houi

eo

ANNA

Mamm

Breiz!



*Itron Santez Anna,
Mirif ho Pretoned,
Goulennit dreist pep tra,
Ma vint fidel bepred.*

*Deomp da Zantez Anna,
Ya deomp holl Bretoñed,
Eno an neb a ya
Ganti zo selaouet.*

*Evidomp, pebez sked
Ha levezet ive,
P'eo deuit d'hor c'hemeret
Evit he bugale.*

Evidomp-ni ema
He c'harantez vrasan,
Evidomp-ni e ra
He burzudou kaeran.

Pegement a re glanv
O deus d'ez i rekour
Hag en drougou gwasan
A gav ganti sikour.

Pet gwech he deus roet,
O madelez hep par,
D'an den dall ar gweled,
Ar c'hleved d'ar bouzar.

Pet gwech war ar mör bras
Da dud o vont da göll
P'he fedont e tigas
Avel vat en eun taol.

Ne vern gant pe seurt kroaz
E vezoc'h ankeniet,
Hi a wella pep gloaz
Er c'horf hag er spered.

C'houi, tud gwenn gand an oad
Na zoujit ket an hent,
Ganti goulennit mat
Mervel evel ar Zent.

Tüd yaouank hag a venn,
A-zevri, mont d'an nenv,
Deut aman da c'houlenn
Beza fur, yac'h ha krenv.

Deut c'houi, mammou tener
Evit ho pugale
Warni kemerit skouer
Hi zo bet mamm ive!

Ar gwerc'hezad ganti
Sur a vo selaouet
Mamm ar Werc'hez Vari
A gar ar Gwerc'hezad.

C'houi, tud diwar ar mez,
Gand ar poaniou gwasket,
Pedit hi, hep paouez,
C'houi eo he zud karet.

N'eo ket eun den a ger
Eo he dizoloas,
Met d'eur c'höz labourer
Ec'h en em ziskouezas.

Pedit hi, tud a vor,
E kreiz ar gwall amzer,
He c'halon zo digor
D'ar re zo en danjer.

Dreistoc'h, dal ma savo,
Ar mor e houlennou
D'ez i, vit m'ho miro,
Gwestlit ho kalonou.

Itron santez Anna,
Vid atao trugarez,
D'ho kaout da Geranna
Ni deuiö bep bloavez.

Vel eur perc'hirindel
E tremen hor buhez,
Eyeldan eo kalet,
Leun a distridigez.

Mirit hor c'halonou
Mirit ar Vretoned
Grit d'hor bugaligou
Dont lies d'ho kwelet.

O mamm ar Vretoned,
Piou n'ho kar en hor bro?
Ra vimp ho pobl karet
Bremen, warc'hoaz, atao!

Grit d'eomp holl derc'hel mat
D'ar feiz e pep mare,
Ma vo Jezuz dalc'h-mat
Hon Tad hag hor Roue.